

Pennad 1

Kousket em boa mad e-pad an noz, ar pezh ne oa ket c'hoarvezet ganin alies e-doug ar sizhunioù tremenet. An hanter ac'hanomp e SRPJ Roazhon a oa bet tapet hep ehanañ, tremenet ganeomp hon holl amzer o spiañ un toulladig riblerien hag o doa beuzet Breizh hag ul lodenn eus an Normandi gant kokain hag hachich. Ur fazi o doa graet a-raok dec'h memestra, p'o doa degaset pemp kant lur hachich deus Barselona betek Penn-ar-Bed gant ur *go-fast* ; ma tisplikin deoc'h, kudennoù lojistik ur *go-fast* a denn un tamm mat da re an TGV : klasket e vez gounit dek munutenn ouzhpenn etre Roazhon ha Pariz, mes da betra e tal gounit dek munut gant an tren pa ranker koll un hanter-eur pe un eur da dapout ar gar gentañ pe da guitaat an eil ?

Ar memes enkadenn a gaver a-wechoù pa vez savet ur *go-fast* : an hini hon doa tapet a-raok dec'h a oa paseet hebiou Bourdel, Naoned ha Roazhon da zaou-c'hant d'an eur, nemet e oa oc'h en em ruzañ da 10km d'an eur a-dreñv lost un añsilerez-mañ etre Kommanna ha Lokeginer pa oa bet harpet ganeomp. Ha kerkent ha kraouiet an daou zen a oa o kas ar wetur, o doa gallet

hon kensorted eus Pariz, Rouen ha Le Mans lakaat o c'hrabanoù war an teir dousenn a lachefridi a oa hon daoulagad o parañ warne.

Er skalieroù em eus kavet ar c'habiten Jérôme Navier-Stokes :

— Aesaet eo dit abaoe dec'h ivez, Glaodina ?

— Gast ya. Moarvat eo gwir evit an holl er skipailh, ha te ivez en o zouez !

— Ya evel-just. Gallet 'm eus kas Muriel d'ar sine ; abaoe miz, ma n'eo ket ouzhpenn, ne oamp ket bet hon-daou.

Ne c'hellan nemet trueziñ war e donkad, ha war hini ar boliserien all. Evidon ez eo ouzhpenn bloaz zo n'on ket bet en ur sal deñval ; betek pevar, pemp bloaz zo ez aen alies a-walc'h, asambles gant ma merc'h Maiwenn, mes bremañ, un dimezell eus ur c'hlas prepa n'he deus ket ezhomm eus he mammig ken evit ar riboulladennoù bihan-se ; ma, tremen a ra pep tra, ha *fugaces labuntur anni*, evel ma lavar Maiwenn pa sant emañ o kozhiñ. E fin ar gont, Jérôme c'hoazh en deus chañs pa c'hell mont d'ar sinema gant e zousig ; tad Maiwenn zo aet kuit a-ziganin pell zo, hag an nebeud re all a zo bet abaoe n'o deus ket padet ; soñj am eus c'hoazh deus penn alvaonet an hini diwezhañ, ur gwaz a-feson, kravatennet hag rochedampezet betek re marteze, pa 'm boa anzavet dezhañ e oan komiser polis : evel pa vije bet o paouez poukañ d'un touseg hep dont a-benn d'ober ur briñsez deus outañ, ha chom a rae da sellet ouzhin gant nec'hamant ha doñjer kemmesket.

Ur galv gant ma fellgomzer, 'keit m'emañ Jérôme o vont da welet pesort keleier fresk zo war e urzhiataer ; evidon eo ma mestr, ha moarvat n'eo ket evit taoler

meuleudi da'm skipailh hepken, mes evit reiñ deomp un tamm labour ouzhpenn :

— Glaodina ? E c'hellit dont betek ma burev, mar plij ?

Ar c'homiser-pennañ Vandoren zo a-dreñv e vurev, o sellet ouzh paperachoù nevez-tennet war ar voullerez a zo c'hoazh o rouzmouzat en ur c'horn, sko ar speurenn.

— A, Glaodina, lakaet omp bet gant prokulator Brest war un afer luziet a-walc'h : un den zo bet kavet marv e Aodoù-an-Arvor, ha douetañs zo e vije bet lazhet. Bez' e oa war ur chalfod o tistrujañ ur voger dirapar hag a oa dezhañ, ha war a seblant eo kouezhet, asambles gant un nebeud mein benerezh hag o deus friket dezhañ kest e doraks. Ha peogwir e oa o chom nepell ac'hano, nemet e Penn-ar-Bed, ha gant an helibini a vije bet etre archerien Plouared ha re Plouigno pe Montroulez, e oa bet kavet gwelloc'h gant ar justis gelver SRPJ Roazhon.

Kompren a-walc'h a ran ar prokulator. Alies e vezomp efedusoc'h dre ma ne rankomp ket souzañ nag ober un hanter-dro pa dreuzomp harzoù ur c'hanton.

— Peogwir eo c'hwi a anavez Penn-ar-Bed ar gwellañ, em eus soñjet e vefec'h efedusoc'h war ar maezioù don eget an darn vrasañ eus ho kenvreudeur.

Asantiñ a ran d'e gomzoù, daoust d'an dispriz a santan evit ar maezioù don. Savet on bet e Brest, hag ar pezh a chom deus ma familh, yontred ha moerebezed, zo souchet mad etre daou gleuz e Plougastell evit an darn vrasañ anezhe. Chom a ra ma chef gant an duilhad paperioù etre e zaouarn ; plijout a ra dezhañ ober ur sintezenn eus ar pezh a zo bet kavet gant an enklaskerien all a-raok reiñ ar stropad dielloù da lenn d'e genlabourerien.

— Ha petra zo ha ne glot ket gant ur gwallzarvoud

en afer-se ? a c'houlennan. N'eo ket ar wech kentañ d'ur mañsoner kouezhañ diwar e chalfod gant mein pounner pe distabil ; dreist pep tra ma eo bet savet ar chalfod a-bempoù, pezh a c'hoarvez un hanter re alies, maleüruzamant.

— Gwir eo, eme Charly Vandoren en ur sellet eeun ouzhin. Brall-divrall e vez ar chalfodoù re alies, mes amañ ez eus bet kavet un dra sebezus gant ar jañdarmed : kaset e oa bet ar paotr da ospital Lannuon, ha pa oa bet savet roll e zilhad eno, botez ebet ! Diouzh ar mod anezhañ e oa ar paotr o tiskar moger ur pennti pe ur c'hraou kozh gant ul loc'h, pezh n'eo ket souezhus, mes ivez war e chosetoù, pezh a zo souezhusoc'h memestra. Kaer o deus bet klask, jañdarmed Plouared n'int ket deuet a-benn da lakaat an dorn war ur re votoù bennak. Graet zo bet ur c'horfskej abaoe, hag aze, ur souezhadenn all : ma oa marv ar paotr, n'eo ket abalamour d'ar goulioù en doa gouzañvet gant ar vein o kouezañ warnañ e-traoù ar chalfod, mes kazimant sur a-gaozenn d'un taol war chouk e gil.

Alo, ur gudenn nevez da zirouestlañ. Dre c'hras Toue, evel ma lavare ma mamm-gozh, Jérôme Navier-Stokes en deus bet amzer da ambroug e Vuriel betek ur sinema, rak e-pad ur pennad mat, 'm eus aon, ne gavo ket tamm sal deñval er biojoù ; eya, war ar maezioù don tro-dro da Blouared n'eo ket stankoc'h ar salioù sinema eget ar minaredoù e Lesneven pe e Kerlouan.

— Hag e pelec'h eo bet c'hoarvezet ar muntr ? a c'houlennan ouzh ar Vandoren, hag e kofesaan ouzhin ma-unan : « Eüruzamant n'eo ket e Plougastell pe e Loperch'hed e rankin mont d'ober ma enklask ».

Start a-walc'h eo kas un enklask en-dro, mes kas anezhañ dindan daoulagadoù ar familh tost pe bell...

— En Aodoù-an-Arvor, war barrouz Plougraz, en ur gêriadenn anvet Skrabyar, eo bet kavet ar c’horf. Mes ar paotr-se a oa o chom e Plourin-Montroulez, e Penn-ar-Bed, hag en doa un atalier e Botsorc’hel, Penn-ar-Bed atav.

Chom a ra ar c’homiser-pennañ da sellet nec’het ouzh ar mousc’hoarzh a zo en em stummet war ma bizaj pa ’m eus klevet anv ar gêriadenn.

— Mann ebet, emezon, just an anv Skrabyar, hag e tisplikan d’ar paourkaezh galleger unyezhek penaos treiñ an anv-se e yezh e gavell.

Ruziañ a ra un disterad, mechañs eo abalamour d’e ziouwer a zeskadurezh, hag astenn din neuze ar stropad pajennoù a oa en e zorn abaoe ar penn kentañ :

— Piv a vefe diouzh ho krad evit kas an enklask-se da benn ? a c’houlenn.

— Navier-Stokes zo efedus pa vez kel a zirouestlañ traoù luziet, a respontan. Ha ma vez ezhomm e c’houlennin ganeoc’h kaout ar C’herezeon yaouank pe neuze Eliza Magouroù.

Goulenn a ran pardon *in petto* ouzh ar c’habiten Navier-Stokes, hag a gavo start bezañ o pouleñvat etre Plougraz ha Botsorc’hel, pell diouzh kêrioù bras sivilizet ; prometet, Jérôme, ma rankomp kas an enklask betek Kemper pe Brest, ez eo te a vo kaset di. Krog on da vraslenn pajennoù an archerien, hag aze, kerkent hag ar pemp linenn gentañ, anv an den marv a ra *bek* em fenn.

— Jili Gwilhosoù... Selaouit ’ta, Charly, ne vije ket un den tri-ugent vloaz bennak ?

— Geo. Anavezout a rit anezhañ ?

Ne respontan ket diouzhtu. Gortoz, gortoz... Gwilhosoù zo un anv a vez kavet stank a-walc’h etre

Karaez ha Gwengamp. Chom a ran da glask... Ganet e Pabu (22), bloaz ha tri-ugent bremañ. Micherioù graet gantañ : taksi, tavarnour, enklasker war e gont, gwechall-gozh. Santout a ran neuze ma gwad o tiskenn buan-ha-buan deus ma fenn da bakañ ma c'hof.

— Ya, anavezout a ran anezhañ... Anavezet am eus bet anezhañ, gwechall, peogwir on bet o labourat evitañ e-doug tri bloaz bennak, mes se zo un istor kozh, a-raok ma vijen aet e-barzh ar polis, bepred. Ne 'm boa ket bet tro da welet anezhañ abaoe pemp bloaz warn-ugent, ma n'eo ket ouzhpenn.

— Aet oc'h disliv tout, Glaodina, eme ar Vandoren. Azezit da c'hortoz (hag e teu da silañ ur gador dindan ma feskennou, kentañ gwech din gwelet an dra-se !). Ma kavit gwelloc'h e rofen an enklask da unan bennak all...

Azezal a ran. Ne 'm eus ket c'hoant da gontañ da big pe vran ez on bet o vevañ gantañ ivez, setu e tavan. Chom a ra dilavar ar c'homiser, da c'hortoz ma teufen war-c'horre en-dro ; e-keit-se e tap krog en un tas hag e ya da ziskargañ din ur berad kafe. Sapristidi, pebezh keloù ! Jili zo marv, muntret gant unan bennak ; ma vankan dezhañ un dra hiriv, a soñjan, ez eo klask an hini en deus graet e stal dezhañ.

— Mat eo, emezon-me. Diaes eo din klevet eo bet muntret ma fatron kentañ, dre m'en deus degaset din un tamm mat a draoù, rak ma 'z on en em lakaet da fourañ ma fri el lezennoù a bep sort, d'ober studioù war ar gwir ha da zont da vezañ ur poliser war-lerc'h, ez eo dre c'hrad an den-se. Un dlead eo din mont war roudoù e vuntrer pe e vuntrerien.

Goude un hevelep sarmon, *beau comme l'antique*, eo aesaet d'ar Vandoren, rak 'm eus aon e oa skort an dud

divres en hon servij er mareoù-mañ. Ne chom din nemet
mont da gelaouiñ Jérôme e rank kuitaat ar gêr vras evit
mont d'ul lec'h kollet, disinema, diADSL ha didavarn
un hanter re alies evitañ.

Pennad 2

Amzer din da verniañ un nebeud dilhad ha peadra da chom hep flaeriañ re dirak an dud a bep sort a'n em gavfen ganto – archerien, testoù, ostizien hag ostizezed, glabouserien a bep neuetañs –, ur sac'h-kousket ouzhpenn e kenkaz, hag e oan prest da gemer penn an hent da vont etrezek Aodoù-an-Arvor. Un *texto* da'm merc'h da lavaret dezhi n'eo ket sur da gavout he mammig er gêr er *week-end* a zeu, hag em eus graet ur pennad tizh gant an hent bras ken em eus gwelet Gwerliskin skrivet war ur panell-hent.

Ken buan all eo ken didavarn Plougraz ha ma eo Purid-Kintin pe Langristin an deiz a hiriv, 'm eus soñjet, setu on chomet a-sav e-kreiz bourk Gwerliskin, dirak ar prizon kozh ; dre chañs ez eus un ostaleri amañ da nebeutañ, a lâran ouzh ma hiviz, goude ur sell war diez ar blasenn. N'eo ket kreisteiz c'hoazh, chom a ran em gwetur, pajennoù ha pajennoù am eus da lenn, ha dedennus int evidon mod pe vod.

En em soubañ a ran e tammoù eus buhez Jili.

Lenn a ran er wez-se eo bet enklasker war e gont e Brest, ar pezh n'eo ket un nevezinti evidon, mes pa oan gantañ e yae kamm-digamm e afer dija, ha kuitaet am

boa anezhañ a-raok ma rafe freuz-stal. Se a oa pemp bloaz warn-ugent zo, eeun hag eeun. Tri bloaz warn-ugent e oan d'an ampoent. Ha goude-se...

Bet eo o labourat en un ostaleri (o telc'her anezhi ? N'eo ket gwall splann displegadenn ar jañdarmed) d'ar mare ma oan war ma studi war ar gwir e Roazhon. Goude-se eo bet taksi e Lannuon, mes tapet e oa bet ur wech gant ur berad alkool a re war vourzh. Gwir eo e lonke dija pa oamp asambles ; ne oa ket c'hoazh ur sklanker achu, mes re e oa evit ma grad, rak santout a raen a-wechoù e oan darev da heuliañ anezhañ war an hent-se.

Toer eo bet ivez, e-pad ul lajad, o labourat evit ur mignon deus Bear, da gentañ, ha war e gont da c'houde. Sevel chatal en deus bet graet ivez, mes n'eus ket da gavout drol, perc'henn e oa e vamm war douaroù a bep sort etre Plouared ha Kallag, pelec'h en just, n'on ket evit lâret, mes er c'horn-se, bepred. Beilher-noz eo bet ivez ; ma Doue, un troc'had den eveltañ a c'helle lakaat meur a lañfre da chom sioul, hep kontañ e oa bet stummet e-pad e goñje gant ar barachutisted. Da ziwezhañ, war a seblant, e rae un tamm trafik arrebeuri kozh war Internet gant sikour lec'hiennoù evel ar *Bon Coin*.

Pa seller mad, ne gaver ket kalz a dra er-maez eus al lezenn, war-bouez ar c'hwec'h miz ma oa chomet hep e aotre da gas ur wetur. N'eo ket bet tapet morse evit laeroñsioù, nag evit paperioù filoutet, nag evit un trafik drammoù.

Marv e vamm c'hwec'h miz zo, setu e oa perc'henn war meur a venaj ha douaroù a bep sort ; un ti-hañv en doa ivez, ma oamp bet div pe deir gwech, e Sant-Maloù pe just e-tal kichen... Nemet ha gwerzhed e vijent bet tout dija ?